

Stal c'hoari-roll kreion ha paper

Gant Brieg an Doujet

Dait da zizoloiñ rummad c'hoarioù frankañ ar bed, harz ebet d'an ijin e-kontrel d'an c'hoarioù-video pe kevredigezh boutin. Beajit dre ar bed hag an amzer, bevit taolioù-kaer hep sevel diâr ho kadoer ! Kontit deomp penaos oc'h daet da vout Mitonig, hanter kazh hag hanter razh, kentañ « krouadur » ar startup Kimera ; Saith Sillafu, Rouanez veur ar seizh hud pe c'hoazh Skrammus Filibus, an intent artifisiel a dennas ur garg nukleel er blez 2029. Àr piv pe petra ? Deoc'h-c'hwi da gontiñ deomp.

“C'hoari-roll kreion ha paper, **digor d'an HOLL**. Dait da gontiñ ha da veviñ un istor a-stroll. Sistem simpl ha dishañval bep mintin. Sistem donoc'h d'enderv, ar memes a-bad ar sizhun. Dibabet e vo ar sistemoù hag ar bedoù (istorel, faltazi, skiant-faltazi, bed gwirion...) doc'h c'hoant ar stajidi. Tro en do pep unan da gas un abadenn mar kar. Daet e vo mat brezhoneg pep unan, sikour a ray dishañvalaat an tudennoù : gwir eo ne gomz ket elfed, korred, orked ha trolled tre ar memes parlant. Live B2/C1 goulennet”

N'anavezit ket an c'hoari-roll ? Skouerioù àr <http://troplongpaslu.fr/jeux-de-role-courts/>

Evit piv ?

- Digor d'an holl adal 15 vlez, forzh pesort skiant-prenet ho pehe pe n'ho pehe ket.

Petra eo an c'hoari-roll ?

- Un c'hoari kontiñ hag ijin un istor a-stroll eo. Un dudenn a zo da bep c'hoariour pe c'hoariourez a dapay plijadur é lakaat anezhi da vonet àr-raok, tapout skiant-prenet, kavout teñzorioù, savetaat pe distruj ar bed...
- Er memes skipailh e c'hoari an holl, àr-bouez ar mestr-ez. Mestr-ez an c'hoari a vo àr-un-dro o brasañ sikour hag o brasañ enebour ha eñ-hi eo a c'hoariay an holl dudennoù eil renk a gaver en istor.
- Mestr-ez an c'hoari a lak ur moull da bep tra, getañ-i e vez ar gwir atav, asantet, nac'het pe kemmet kinnigoù an c'hoariourion. Taolit evezh : gouest eo da gemm disoc'h un diñs get ur sell ! Get ar mestr-ez e vez savet steuñvenn hollek an istor... ha get an c'hoariourion ha c'hoariourezed e vo distummet a-grenn :)
- Mil mod a zo d'an c'hoari-roll. Genomp e vo c'hoariet er mod « kreion ha paper », doc'h taol **pe er-maez ivez** pa vo kaer an amzer.

Pesort sistem ?

- Embannet zo bet kantadoù a sistemoù c'hoari a bep sort, berr pe hir, simpl pe luziet. Genomp vo graet an daou :
 - krogadoù berr dindan 1-6 pajennad reolennoù èl ma kaver da skouer àr <http://troplongpaslu.fr/jeux-de-role-courts/>
 - un abadenn binvidikoc'h àr meur a hanter zevezh doare Tiny, My Little Pony, Dungeons & Dragons, Warhammer 40,000 Black Crusade, Pathfinder, Vampire the Mascarade... Displeget e vo deoc'h pep tra, rit ket bil.
 - N'eus ket afer anavezout ar bedoù meneget, graet e vo get ur sistem awenet get ar re a-us en ur bed ijinet genomp, hrevez c'hoantoù ar strollad c'hoariourion ha c'hoariourezed (faltazi, skiant-faltazi, istorel, bed a-vremañ, ukroniezh, utopiezh, distopiezh, siberpunk, steampunk, zombi, gourharozed, h.a.)

Program

- Dibabet e vo an c'hoarioù doc'h c'hoant ar berzhidi.
- Da vintin : un abadenn get ur sistem simpl ha nevez bemdez, un hanter zevezh seul gwezh, dibabet e vo ar mestr pe ar vestrez e-touesk ar berzhidi.
- D'enderv : un c'hoari pinvidikoc'h, ar memes bemdez, kaset àr pemp hanter zevezh.
- Tommet e vo ar c'horfoù hag ar speredoù get ur c'hardeur c'hoariva e penn-komañs pep abadenn.

Petra degas ?

- Peadra da skriv.
- Roet vo deoc'h diñsoù a bep sort (pevar, c'hwec'h, eizh, dek, daouzek pe ugent tu dezhe).
- N'eus ket afer bout treuzwisket na livet, hogen ne vo ket nac'het naket.

Pegen sirius eo an c'hoarioù-se ?

Amañ emañ bravitez an c'hoari-roll : doc'h youl ha temz-spered ar berzhidi e vo pep tra. Plas a zo evit fent, feulster, from, karantez ha rac'h. Unan pe egile, ha memes an holl àr-un-dro. Skouerioù :

- Adtapout mod d'ober un abadenn skinwel : Kastell Boyard, Etrekêr, Bourrapl ar verdeadenn, Koh Lanta, Enezenn an temptadur, Er Pradoù e kaver karantez, ar Vouezh, Ar bidoc'hig dizimez, h.a.
- Tasmantoù é klask kuitaat bed ar re vev.
- A-raok monet e bourzh an egorlestr ho peus prometet tri zra. Lod ag ar skipailh o deus resevet tri malloc'h. Ha gouest e voc'h monet betek penn ar veaj ?
- Istor mignoniezh etre peizanted hag o loened. Hiriv eo bet kaset servijoù ar gouarnamant da daliñ doc'h ur viruz nevez...
- Ken lan eo bed ar re varv ma ne varv den erbet ken !
- Robodoù hanter vourdet àr ur blanedenn divuhez.
- Tapet oc'h en ur gwallhuñvre, seul taol ma varvit e krog ar gwallhuñvre adal ar penn-kentañ. Deoc'h da gavout an tu da vonet maez.
- Tavarn. Da gustum e kej eno an harozed hag harozeded a-raok monet da ziskoulm o c'hefridi. Hiriv enta e chomint en davarn.
- Krennarded kollet en ur greizenn genwerzhel iskis ha difin.

EVEZHIADENN : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.

